

PEDENNOU**Diouz ar mintin**

O Tad, Mab ha Spered Santel
 Me gred oc'h eun Doue eternal
 Krouer an oll, partout presant,
 Me hoc'h ador devotamant.

Me gred oc'h tri Fersoun divin
 Ho zri ker bras, ker fur, ken din ;
 Disting an eil diouz egile,
 Eun Doue ho zri, non pas tri Doue.

Me gred oc'h just ha galloudus
 Da rei d'ar viz ha d'ar vertus
 Diouz ar mairit ar rekoumpans
 Punition diouz an offans.

Me gred an inkarnation
 Ha mister hon redemption ;
 C'houi, Mab Doue, en em c'hreat den
 Evit prena natur humen.

M'hoc'h ador, Jesus, va Salver
 Er Sakramant euz an aoter ;
 Me gred emace'h enhan presant,
 Guir den, guir Doue reolamant.

Konsakri a ran va devez
 D'ho kloar ha d'am silvidigez,
 Hag ec'h offran va oll boaniou
 E pinijen d'am fec'hejou.



*Pater, Ave, Credo, Confiteor, Litanious
 Jesus, Goulc'hemennou Doue hag an Ilis,
 De Profundis, an Angelus.*

Diouz an noz

Konsakri a ran va nosvez
D'ho kloar ha d'am silvidigez
Hag ec'h offran va oll boaniou
E pinijen d'am fec'hejou.

Examinomp hor c'houstians.

Pardoun, va Doue trugarezus,
Pardoun, en hano va Jesus ;
Keuz am euz 'balamour d'eoc'h
Gant ho kras me jecho pelloc'h.

Guerc'hez Vari, guir vam Doue,
C'houi zo va fizians n'he c'houde,
Ha c'houi, sant Joseph, he fried,
Ouzoc'h ho taou m'en em erbed.

O Kaloun zakr euz va Jesus,
Kaloun meurbet karantezus,
Ra viot da viken karet,
Ha da virviken adoret !

*Pater, Ave, Credo, Confiteor, Litanie
ar Verc'hez. Goulc'hennennou Doue hag an
ilis, De Profundis, an Angelus.*



KANTIKOU

Kantik ar Zilvidigez

Ton : D'hor Mamm Santez Anna.

O Mari, o Mamm vad,
Grit deomp kompren ervad
Eo ar zilvidigez
Affer vraz hor buez.

Savetei hon ene
Eo al labour kenta
Merket deomp gant Doue
Da ober er bed-ma.

Peb hini n'hen deuz bet
Met eun ene ebken ;
Eur vech unan kollet,
Rapari n'heller ken.

D'in-me petra dalfe
Kaout madou ar bed holl,
Ma zaffe, da c'houde,
Va ene paour da goll ?

Talvoud 'ra hon ene
Dreist an aour, ar perlez ;
Peb ene d'eun Doue
Zo koustet he vuez !

O pegen diskiant
Ha pegen didalvez
Eo an den dizeblant
Ouz he zilvidigez !

Pa deuio ar maro,
Dioç'htu vezimp barnet ;
Hon ene 'vit ato
Vo salvet pe zaonet.

Hirio e c'hellomp choaz
An ifern pe an Ee ;
Re zivezad varc'hoaz
E vezo marteze.

Chench a rankan hirio,
Heb dale tamm ebet.
Ah ! kousto pe gousto
'Fell d'in beza salvet !

Kantik an Oferen

Ton : *Euz a brema betek ar maro.*

DISKAN :

*Kinnigomp holl ar Zakrifiks,
Gant hor mamm zantel an Iliz,
Sakrifiks divin Hor Zalver,
En em ginnig var an Aoter.*

E sakrifiks an oferen,
Jezuz ara d'he veleien
Nevezi 'n eun doare dispar
Sakrifiks braz Menez Kalvar.

An Oferen !... Pebez tenzor !
Dreizhi Doue a gav henor ;
Dreizhi e teu d'hon eneoù
Bennoz Doue gant he c'hassou.

Va Doue, deoc'h e kinnigan
Gant resped an oferen-man,
D'hoc'h adori ; da ziskleria
Ez oc'h hor Mestr, ha Mestr peb tra.

Ouzpenn, 'vit ho trugarekât
Da veza 'n hor c'henver ken mad :
Holl diganeoc'h hon euz bemdez
Madoberou, grassou nevez.

Siouaz ! 'n hor buez tremenet,
Omp kouezet mil guech er pec'hed ;
Jezuz, dre verit ho poaniou.
Pardounit deomp hor pec'hejou.

Dre an oferen-ma ive.
Plijet ganeoc'h ; o va Doue,
Pa 'z eo ken paour hon eneoù,
Rei deomp aluzen ho krassou.

Kinnig a reomp an oferen,
'Vit ezomou ar bed kristen ;
Mes, evit tud ar barrez-ma
E fell deomp pedi dreist peb tra.

Dre nerz ar zakrifiks santel,
Ra vo diouzomp kasset pell
Al leondouet, ar gassouni,
Ar pec'hed vil, ar vesventi.

Ouz an Annaoun, o va Jezuz,
Grit ive eur zell truezuz ;
Ha varnho lakit da zisken
Ho koad sakr evel eur c'hlizen.

Ra vo heb dale diboniet
Hor c'herent hag or mignoured ;
Roit dezho, dre an oferen,
Ar peoc'h a bado da viken.

Guerc'hez Vari, va Mamm garet,
E harz ar groaz ken glac'haret,
Va zikouñt da skriva doun
Pemp gouli Jezuz em c'halloun.

Ha c'houl, holl Zant ha Zantezed,
Ha c'houl, holl-elez benniget,
Deomp holl roit skoazel ho peden
Da glevet mad an oferen.

Kantik en honor d'ar Zakramant

O Sakramant burzuduz,
Leac'h omp maget gant Jesus.
Ennhan ema Hor Zalver; }
Kredi a ran var he c'her. } bis

DISKAN :

Adoromp Doue
E Sakramant he garantez ! } bis

Jesus, d'an noz kent mervel
'Ro galloud d'he Ebistel
Da jench ar bara, ar guin
'N he gorf hag he c'hoad divin.

Ar veleien, d'ar gorreou,
A gonsakr gant he gomzou,
Ha Jesus, mestr braz ar bed,
Ouz ho mouez a zent bepred.

Heb kuitat he varadoz,
E choum aman deiz ha noz ;
Choum a ra en hon touez
Dalc'het gant he garantez.

Euz ar guin hag ar bara
Petra joum ? Ne joum ken tra
Nemet ar spesou dister
A guz korf, goad Hor Zalver.

Aman n'hellomp ket kourmpren ;
Ar feiz hebken hor c'helen...
Gant ar feiz sklerijennet,
Ne fazi ket hor spered.

E doare ar sperejou
Eo 'n em laket en hostiou.
Pa vez an hostiou torret,
He gorf sakr n'eo ket rannet.

Neb ia d'ar gommunion
Gant ar pec'hed 'n he galon
A gemer skouer var Judaz,
Hag a ra eun torfed braz.

Mes, pa vez, araok tostât,
Ar goustianz e stad vad,
Unanet gant Hor Zalver
Gwir eursted e kaver.

Meulomp, karomp, adoromp
Eun Doue ker mad ouzomp.
Red eo sonjal dreist pep tra
En he zonezoun gaera.

Jesus eo ar Roue braz ;
Adorit-hen var he groaz
Hag en Ee, hag e myster
Sakramant sakr an Aoter.

Peden da Jezus disprijet e Sacramant an Aoter

TON GALLEK : *Au sang qu'un Dieu va répandre*

Jezus, bepred var an aoter
E choumit dre garantez,
Evit rei d'eomp e peb amzer
Ho krasou gant largentez.
Hogen, e leac'h beza karet
Hag enoret gant peb den,
Ez oc'h aliez disprijet,
Gant ho pugale zoken.

Guelet on euz, o va Jezus,
An aerouant miliget
O sêvel he benn ourgouilluz
Var-zu ho tron benniguet.

He zent a strakl gant ar gounar
Abalamour ma veuler
Krouer an env hag an douar
E sakramant an Aoter.

Nemed re ne veler bemdez
Oé'h heuilla he vannielou
Er brezel a ra hep paouez
D'eoc'h-hu, roue an envou.
An dud hep feiz a gerz gantha
Varlerc'h an heretiked ;
Kalz re all c'hoaz en em laka
E-touëz he zoudarded.

Guelet a zo bet eun amzer
Leun a vez, a dorfejou :
Lakeat e oac'h, va Zalver,
Er meaz euz hoc'h ilizou ;
Goad ho peleien a rede,
Ar c'hroasion a oa pilel,
Hag an dud vad holl a grene
Gant aoun da veza lazet.

Dirak Jesus, hor c'harantez,
En em westlomp, kristenien,
D'he garet epad hor buëz
D'he garet da virviken.
Oh ! lezomp an dud dirollet
Da redek d'an ebatou :
Dirak an Aoter benniget,
E kavomp an holl joaïou !

Brema c'hoaz hoc'h enebourien,
Hep beza ken dirollet,
A garfe guelet ho lezen
Gant an dud holl disprijet ;
Dre ho guall-skuer, ho goapërez,
E klaskont rei da gredi

Ne d-eo nemed eur follentez
Ho karet hag ho meuli.

Meur a judaz e zeu ivez,
Ar mel var ho muzellou,
Gant ar vrasa fallagriez
E gueled ho c'halounou,
Da zigemeret ac'hanoc'h
Divar an daol benniget,
Evit ma c'hellint buanoc'h
Lakaat an dud d'ho c'haret.

Ni hon-unan hon euz ivez
Mantret mil guech ho kaloun,
Dre hon nebeud a garantez
Evit ar gommunion ;
Dre ar guall-skuer hon euz roet,
Enn hoc'h ilizou zoken,
Ha p'hon euz lezet hor spered
Dievez enn offeren.

Setu perak, leun a c'hlac'har,
E teuomp betek enn-hoc'h
Hag en em strinkomp d'an douar
Evit ho pedi guelloc'h.
Pa velit c'hoaz tud glac'haret
Daoulinet enn ho kichen,
Ankounac'hait ar boan spered
A ra d'eoc'h ar bec'herien.

Eled hag arc'heled Doue,
Enn-dro d'an Aoter renket
Evit adori ho roue,
Enn hosti zantel kuzet :
Pedit evid-omp, pec'herien,
Evit-ma c'hellimp ivez
Her meuli ganhoc'h da viken,
E gloar he rouantelez ! -

Konsekration d'ar Galoun Zakr

TON : *O Sakrament burzudus.*

Kaloun zakr, dous ha tener
Daoulinet harz hoc'h aoter
Ni fell deomp, e guirionez } *bis*
Asten ho rouantelez.

DISKAN :

D'ho Kaloun, Jesus,
Hor c'halonou karantezus ! } *bis*

Kaloun Zakr, renit bepred
Var hor c'horf, var hor spered ;
Deoc'h e zint, deoc'h hoc'h-unan,
N'ho rannomp ket gant Satan.

Kaloun Zakr, renit ivez
Deiz ha noz var hon tiez ;
Pep famill 'vit ar beden,
'N em vod dirak ho skeuden.

Kaloun Zakr, grit d'hor parrez
Choum en ho rouantelez,
Rak enhi, iacouank ha koz
En em blij en ho pennoz.

Kaloun Zakr, bezit Roue
Var vella poblou Doue :
Var ar Frans, var Vreiz-Izel,
Dalc'het bepred ho skoazel.

Kaloun Zakr da virviken
Renit var ar gristenien
Bodet, en dro d'ho paniel,
Bugale an Aviel.

Kaloun Zakr, lezit ho kloar
Da lintra var an douar
Azioc'h penn an oll boblou
Betek fin ar c'hantvejou.

Kaloun Zakr, er baradoz
Pa vezomp eat d'hor repoz,
C'houi 'reno var hon ene
Epad an Eternite.

Peden a geuz da Galoun Jesus

VAR DON : *O va Jesus, setu deuet an amzer.*

DISKAN :

Parce Domine, parce popule tuo, ne in
aeternum irascaris nobis.

I

E leac'h an dud n'em ziskuez dizeblant
En eur dremen e biou d'ho Sakramant
O Kaloun Zakr, 'hars an Aoter
Ni deuo d'hoc'h adori beb an amzer.

E leac'h an dud ho tisprij o spered,
Dallet ma zint gant moged ar pec'hed,
O Kaloun Zakr, hor feiz beo
Skedusoc'h en hor buez a lugerno.

E leac'h an dud a gresk ho melkoni
Dre ho c'hounnar ha dre ho c'hassoni
O Kaloun Zakr, hor c'harantez [tez.
A redo diouz hor c'haloun gant largen-

II

Ouz an dud laosk morgousket en ho feiz,
Ouz an dud yen ho tilez noz ho deiz,
O Kaloun Zakr, heñ ho puez
Ha goude pred ho maro, truez, truez !

Ouz an dud lik en em blij er pec'hed,
 Ouz an dud skanv ho tisprij a spered,
 O Kaloun Zakr, hed ho puez
 Ha goude pred ho maro, truez, truez !
 Ouz an dud kriz, o deuz kaz ouz Doue
 Ouz an dud fall ho nac'h evel Roue,
 O Kaloun Zakr, hed ho puez
 Ha goude pred ho maro, truez, truez !

III

Ouz hon ene ken douget d'ar pec'hed,
 Ouz hor famill re laosk en hoc'h andred,
 O Kaloun Zakr, hed hor buez
 Ha goude pred hor maro, truez, truez !
 Ouz hor parrez, ouz oll barreziou Breiz
 Re lezirek da veva ho guir feiz,
 O Kaloun Zakr, hed ho buez
 Betek fin an amzeriou, truez, truez !
 Ouz hor mamm-vro, ouz rouantelez Franz
 A daol varnhoc'h avechou dismeganz
 O Kaloun Zakr, hed he buez
 A vreman da virviken, truez, truez !

Karantez da Galoun Jesus

TON : *Jesus bepred var an aster.*

DISKAN :

*Me fell din, Kaloun va Zalver
 Ho karet a greiz kaloun
 C'hui a zo ken mad em c'henver,
 C'hui zo va quella mignoun ;
 Ho karet keit ha ma vevin
 Ha gant ho c'hras, va Doue,
 Ho karet en env, pa varvin,
 Epad an eternite.*

Var ar Groaz, Va Zalver Jesus,
 Ho Kaloun a zo toulllet ;
 Deuz gouelet ar gouli skrijuz
 Dour ha goad zo diruillet ;
 Evel euz ar vezen fraillet
 Daelou balzam a ziver
 C'houez vad ho kostez digoret
 A ro pare d'ar pec'her.

Siouaz ! ni hon deuz dilezet
 Tud diboell ! hor guir vignoun ;
 Euz ti hon tad ni zo tec'het,
 Brevet hon deuz he galoun.
 Hor stad a zo guall reuzeudik
 Pell euz ar ger hag ar vro,
 Jesus, c'houi c'halv ar Mab Prodik
 Da vout ha hent an distro.

Setu, eme c'houi, ar galoun
 A garaz kement an den
 Ha n'hen deuz siouas evidoun
 Netra nemet ienien.
 Euz barr an env oun diskennet,
 Bevet em euz en ho touez,
 Ha d'ho tenna deuz ar pec'het
 Em euz roet va buhez.

Da veza ho magadurez
 E choman var an Aoter,
 Ne gayan brasoc'h karantez
 Da ziskouez en ho kenver ;
 Dindan spes eun tamik bara
 Eun Doue a zo kuzet,
 Guelit he galoun o para.
 Ah ! diredit d'he garet.

C'houi, va mab, va merc'h, va mignoun
 Ne rit mui skouarn vouzar

Digorit d'in dor ho kaloun
Da rei didor d'am glac'har.
Em c'haloun-me c'hui a gavo
Grasou puill, grasou nerzuz
Ma zoc'h doaniet m'ho frealzo,
C'houi vezo ganen eüruz.

O Jesus, tavit ho klemmou,
Keuz hon deuz an deiz hirio.
Ni a ro deoc'h hor c'halonou,
Deoc'h int beteg ar maro.
Ni fell deomp ober pinijen
D'ho tigoll euz ho poaniou,
Pardonit deomp-ni pec'herien,
Jesus, klevit hor moueziou.

Kaloun Zakr, kaloun va Doue
Roit d'hon ti ho pennoz,
En tiegez bezit roue,
Beillit varnomp deiz ha noz.
Renit ive hor bro garet
Ma vo c'hoaz kristen da vad,
Ma vezo ho kaloun meulet
Gant peb Gall, gant peb Breizad.

Meuleudi Kaloun Jesus

TON ; *Eles euz ar barados.*

DISKAN :

*O Kaloun-Zakr a Jesus,
Feunteun an oll grasou,
C'houi a zo karantezuz
Dreist an oll galonou ;
Kaloun ar vam denera
A zo dister ha paour,*

*Ha kaloun an tad quella,
E skoaz ho kaloun aour.*

Hirra ma c'hell er bed-ma
Mont nerz ar garantez,
Eo rei evit an nesa
Ar iec'hed, ar vuez ;
C'houi ra kaerroc'h burzudou,
C'houi eo ar Pastor mad,
A vag ho tenvedigou
Gant ho korf hag ho koad.

C'houi zeuaz var an douar
Vit rei deomp ar vuez.
Hag er c'halonou klouar
Elum ar garantez ;
Doue zo nebeut karet,
Evithan ni zo ien,
Grit ma zo anavezet
Ha karet gant pep den.

Eun dervez c'houi ziskueze
Da Vac'harit-Mari
Ho kaloun gant eur c'hleze
Treuzet evidomp-ni :
Gant spern e voa kurunet,
Ha varnhi voa eur groaz,
Hag outhi o tilammet
E velef an tan braz.

An tan-ze zo eur skeuden
Euz tan ho karantez,
Grit ma kouezo eun eulfen
Var hor c'haloun ivez,
Eun eulfen-dan burzuduz
A lak ar c'halonou
Da doma evit Jesus
Ha da heuilh he skoueriou.

Ar groaz-ze deomp a ziskwezh
O poue da ziwaska
Evit hor zilvidigezh
Poanniou euz ar brassa ;
Goude ker braz testeni
A garantez eun Tad,
Piou c'helfe c'hoaz glac'hari
Kaloun Jesus ken mad ?

Sell ouz spern ar Gurunen,
O pec'her aheurtet,
Sanket beteg an empenn
En he benn benniget !
Spern kalet da bec'hejou
O deuz he gurunet,
Goalc'h er c'heuz hag en daelou
Da vuez tremenet.

Sell ouz he galoun digor
Evit da zigemer,
Eno kavi ar goudor
E kreiz ar gwal amzer.
Kuzet diouz an drouk-spered
Hag he virou marvel,
Eno kavi eurusted,
Eno, eur peoc'h santel.

Pardonit deomp, va Zalver,
Da veza ken klouar,
Da veza en ho kenver
Ker ien var an douar,
Teuzit skourn hor c'halonou,
Gant tan zakr ho kaloun,
Grit ma redo hon daelou,
Kaloun Jesus, pardoun !

Kantik Pardonnerien Kalon Jesus

DISKAN :

*O Kalon Jesus,
Kalon dibab,
Bezit, bezit truezuz
Ouz hor bro hag ar Pab !*

Ho pet truez ! — Va Doue, hor selaouet
Evit hor Bro beuzet enn he daelou :
Toullet he fenn hag he divrec'h chadennet
He daoulagad a dro ouz ann envou.

Ho pet truez ! — Va Doue, var ar C'halvar
Ni vel ar Pab, rener braz ann Iliz ;
Seul vras he boan, seul startoc'h ni a lavar :
Bevet ar Pab, ha fin d'he boaniou kriz !

Ho pet truez ! — Va Doue, pa deu Mari,
Mari ho Mamm, d'hor bro d'en em ziskouez,
El leac'h ne deuz nemet lann ha guezeri,
Bleunion ann Env a zavo a nevez.

Ho pet truez ! — Va Doue, ouz dallentez
Kement a bec'h, heb sonjal e reont fall !
D'ezho, hirio, sklerijen ha karantez,
Karantez vraz ma vint kristenien all !

Ho pet truez ! — Va Doue, gant ho Kalon
C'houi glevo mad goulennoù hon hini ;
Pa roit ho koad bemdez er gommunion,
Petra peffe da nac'h mui ouzomp-ni ?

Ho pet truez ! — Ho Kalon, o va Doue,
A ziskouejot da zantez Mac'harit ;
Na feunteun all n'euz bet kavet abaoue
Ken puill he gras d'ann dud keiz a garit.

Ho pet truez ! — Va Doue, c'houi lavare :
Pa falvezo da rouantelez Frans
Beva e peoc'h, beva skeduz adarre,
Ne glasko ken feunteun a bareans.

Ho pet truez ! — Va Doue, gant e sec'het
Ouz ho Kalon hor bro baour a dosta ;
D'ar glanvourez skuillit ann dour a iec'het,
Ha pareet ann hene da genta !

Ho pet truez ! — Va Doue, ho pet truez !
C'hui oar ervad ez omp ho bugale !
Ouz oc'h e sent ar maro hag ar vuez,
Hor sikourit, va Jesus, hep dale !

Oll da Zoue !

AIR FRANÇAIS : *Nous voulons Dieu.*

DISKAN :

*Klevit, o Mam a druez,
Peden hon tadou koz :
Oll da Zoue epad hor buez, } bis
Oll da Zoue er Baradoz ! }*

Ni gar Doue e penn hor skoliou,
Hebd'han skol vad ne gaver ket ;
Ni gar Doue en hor lezennou,
Hebd'han nag urz na peoc'h ebet.

Ni gar Doue var hor menezioù,
Ni gar Doue var hor mor glaz,
Ni gar Doue e kreiz hor c'hoajou,
En hor c'halounou mil gueach c'hoaz !

Ni gar Doue en hor pardonioù,
Doue a ra ho levenez !
Ni gar Doue en hon eureujou,
Doue ho joa hag ho danvez !

Ni gar Doue, ni gar he lezen ;
Pell diouzomp, tud dizoue !
Ni gar Doue, ni gar ar beden,
Doue eo mesur hon ene !

Ni gar Doue hag he groaz santel,
Var gement hent, e kement ti !
Kroaz Doue a zo hor skoazel,
Hor miro da fallgalouni !

Ni gar Doue, ô tud digreden,
A c'hoanta hen diskar er vro.
Ni lavaro gant hor feiz kristen :
Kentoc'h mervel ivez d'hon tro !

Oll da Zoue hor bugaligoù,
Hon tud iaouank o vont er bed !
Oll da Zoue, gant hor priejou,
Hon tud koz var hent ar vered !

Oll da Zoue hor martolodet,
En doun-vor dare da dremen !
Oll da Zoue hor guir soudardet,
E kreiz an tan, var an dachen !

Oll da Zoue e traon an Arvor,
Var ar menez hag en Argoat !
Oll da Zoue ! Setu hon enor.
Setu hon nerz e peb stourmat !

Oll da Zoue !... ann hano kaer-man
Hon harpo ouz an dud difeiz.
Oll da Zoue ! Skrivomp anezhan
Var gement karrek zo e Breiz.

Oll da Zoue !... E pred ar maro,
Doue d'he dro ne nac'ho ket
Kement kristen mad a lavaro :
Biskoaz Doue n'em euz nac'het !

Dac'homp d'hor feiz

VAR DON : *Sainte Religion.*

DISKAN :

Da feiz hon tadou koz, ni potred Breiz-Izel,
 Ni zalcho mad ato ;
 'Vit feiz hon tadou koz, hag en dro d'he baniel
 Ni oll en em stardo.
 Feiz karet hon tadou, morse ni ho nac'ho
 Kentoc'h ni a varvo.

D'ar c'hrouadur bihan, e kichenig e gavel,
 E lakit eur vam vad, en deiz evel en noz ;
 Er boan hag en anken, houman buan ra eur zell
 Var ar groaz santel... e zonzj er baradoz.

D'ar potr, d'ar plac'h yaouank, c'hui ziskouez hent ar
 C'hui lavar en heuilla eb krena dirag den ; [furnez,
 Bezit, tud yaouank Breiz, bezit e-pad ho puez
 Ato gwir gristenien ha morse treitourien.

D'an den koz, gwen e benn, e korn an tan azezet
 O skuill daelou a geuz var e amzer genta ;
 Varlerc'h kals a boan, c'hui lavar, Salver ar bed,
 Er baradoz e vo eürusted evitha.

D'an den divar ar meas hag ive d'an den a vor
 C'hui a ro nerz-kalon er poaniou stourm outho ;
 Gouzout 'reont en env, e kavint oll dor zigor
 Ar vuez vo bet tenn ; d'an drubuil kenavo.

Kristenien da Viken

DISKAN :

D'hor mam santes Anna
 D'ann Itron Varia,
 D'hor Zalver benniguet
 Ni 'vo fidel bepret !

Hor c'halon baour mantret
 Gant glac'har hag ankrez,
 Ni a zo daoulinet,
 Dirazoc'hui Guerc'hez.

Kurun hag avel foll
 Varnomp zo dirollet,
 Hor bro 'zo vont da goll :
 Truez ! mam benniguet.

Lezen Doue guechall,
 'Rene ker kaer ar vro,
 Hirio lezen tud fall
 He stlej eun d'ar maro.

'Vel eur vanden chas mud,
 Gant kounar, noz a deiz,
 Emaint etouez ann dud
 O glask moug ar feiz.

Ni zo guir kristenien,
 Krouadurien Doue,
 Savet en he lezen
 En he zoujans ive.

Ni a zo kristenien
 Prenet gant goad Jesus,
 Maget dre c'hourc'hemen
 Gant he gorf presius.

Kristenien, hor baniel
 A zo kroaz hor Zalver,

Ni er zao soun 'n huel,
Bemdez, e peb amzer.

Eur vrezel griz meurbet,
'Zo great d'hor bugale,
A n'ho dilezit ket,
C'hui zo ho mam ive.

Ar falla kentellou
'Zo roet d'ezho bepret,
Koll a raint ho eneou
E skol ann Drouk-Speret.

Sempl, dinerz, ker bihan,
Ma na vent diouallet,
Gant nebeut a boan
Abred 'vesfent trec'het.

Petra dalv guisegez
Mar gollomp hon ene ?
Ar skiant, ar furnez
A zo holl e Doue.

Guechall hon tadou koz
Brudet 'vit ho furnez,
A glaske 'r Baradoz
Araok ar guisegez.

Skianchou 'zo netra
Pa'z eont enep Doue,
Ni fell deomp dreist peb tra
Savetei hon ene.

Guerc'hez, hor mam santel,
Roit sikour ep dale,
E plegou ho mantel
Kuzit hor bugale.

C'hui a zo galloudus
Var galon hor Zalver,

Bezit madelezuz
C'hui 'zo eur vam dener.
E pevar c'horn ar vro,
Neuze, ni holl Guerc'hez,
Beteg heur hon maro,
Ni a gano bemdez :

Ar Vretounet e Lourd

TON : *Lez Breiz.*

Rouanez Arvor, oll ho saludomp,
O Guerc'hez dinam, ennoc'h e kredomp ! (bis)
O Guerc'hez Vari, dre oll ha bepret,
C'houi voue gant Breiziz ann Itron garet.

Guechal hon tud koz, sentuz d'ho lezen,
En em vouestlas oll deoc'hui da viken.

Hag a-c'houde-vez, al le 'zo miret,
'Vel en deiz kenta ma 'ze bet touet.

Hon Aryor a vev dre ho madelez :
Ni zo bugale deoc'hui da jamez.

Euz ho pugale, o Mam, klevit 'ta,
Klevit ar beden hag ar bromessa !

O Mam hor Zalver, evel hon tadou,
Ni ro da viken deoc'h hor c'halounou.

Mes prijit d'ho tro, arc'h a esperans,
Souten ann Iliz, savetei ar Frans.

Mar be ret difen he honor d'hor bro,
Ar Breizad kristen dispoint a gerzo.

Dindan ho skoazel, epad ann emgann,
Soudard, martolod, 'ra fae var ann tann.

Ar micherour paour, al labourer kez,
A drid ho c'haloun gant ho karantez.

Mam, roñt ho pennoz d'eomp ha d'hon tudou,
 Ha d'hor parkeier, koulz a d'hon aochou !
 D'hon tiegeziou ha d'hor bugale,
 Ha d'hor mignouned 'zo er gear du-ze !
 D'hor martolodet ho pennoz ivez,
 Hi gass oc'h hano d'an Douar-Nevez.
 Skuillit ho pennoz var hor soudardet,
 Rentit d'ho banniel he gloar hag he sked.
 Hag hed hor buez, euz ho c'hrassou c'hui,
 Ni hor bezo sonj, o Guerc'hez Vari !
 Euz ar roc'h santel, pa vimp en hor bro,
 Ar zonz dudius ganeomp a jomo.
 Endra bado 'r bruk var hor menezioù,
 Karantez hor Mam 'vo 'n hor c'halonnou.
 Rak ho pugale, o Guerc'hez santel,
 A c'hed dreizoc'hui ar vuez eternal.
 Oll en ho kichen en env, eun devez,
 'Fell d'ezho beza, Mam a garantez !

Kantik Pelerinet ar Folgoat

DISKAN :

*Patronez dous ar Folgoat,
 Hor Mam hag hon Itroun,
 An dour en hon daoulagat,
 Ni ho ped a galoun !
 Harpit an Iliz santel !
 Avel diroll a ra...
 Tenn hag hir eo ar brezel !
 Ar peoc'h, ô Maria !
 Euz an Arvor, ar gourre,
 Ni deu d'ho saludi ;*

Oll e zoump ho pugale,
 Oll ho karomp, Mari.
 Tud ar gourre, Arvoriz,
 Diredet oump hirio
 Da bedi 'vit an Iliz,
 Da bedi 'vit hor bro.

E Roum hag e kals broioù
 Eo goasket an Iliz ;
 Peur-laeret eo he madou
 Gant enebourien kriz.
 Hirra ma c'heller gueleit,
 Er mor euz tarziou guen,
 Bagik sant Per zo strinket,
 Euz eur garrek d'eben.

Mar d'oc'h Mam ar Gristenien,
 Ma karit an Iliz,
 Eb dale deuit da zifen
 Ho pugaligou geiz.
 Araok e za ho labour
 Gant bugale Satan...
 Mal eo d'oc'h dont d'hor sikour
 A d'hon tenna a boan.

Diouallit na lavarfe
 An dud fall zo er bed :
 Guechal ez oa Mam Doue
 Dous hag eaz da garet ;
 E diskouarn a ioa tano,
 Klevet a rea raktal,
 Hirio ez eo pounner-gleo,
 Outhi eo ret krial.

Nan, nan... Oh ! tavit pelloc'h
 Rag Mari, tud difeiz,
 Morse na deo bet tomoc'h
 He c'haloun en e c'hreiz :

Guelet eo bet o lenya
Var gern ar menezioù,
Bemdez e ma i o paea
Hon dle dre he daelou.

Ar pastor hag an denved
O dezo eun hean ;
Au aour pa vez peur-garzet
A denner euz an tan.
Bremaik Jesus rofo
He dra da bep hini :
D'ar re fall poanioù garo,
Ar peoc'h da dud Mari.

Araok mont kuit, o Mari,
Ni ra eur goulenn all.
Nikun n'efe niveri
Oll gouliou Bro-C'hall ;
Peleac'h ema he gened,
He nerz, he vaillantis ?
Pegen-izel eo kouezet
Merc'h hena ann Iliz ?

Patronez dous ar Folgoat,
Hor Mam hag hon Itron !
An dour en hon daoulagat
Ni ho ped a galoun,
Ar Frans zo bras he enk es
Mont a rei da netra...
Outi sellit a drues...
Trues, o Maria !

Bras eo bet hor pec'hejou,
Dister hor pinijen ;
Rak-se he dourn an Aotrou
E chom ar vialen,
Ret eo gounit hor barner
Pe divoada er pri.

Allaz ! n'ellomp hen ober
Nemet dreizoc'h Mari !

Pell zo c'hui zo bet choazet
Evit hor rouanez ;
E neb bro n'ho peuz kavet
Teneroc'h karantez.
Tud fidel a vandennou
A deu d'ho kaout bep bloaz,
A var hent ho chapelioù
Ne jom eur ieoten c'hlaç.

O tifen guir an Iliz
Eus bet tud eus hor bro ;
Pell dious lanneier Breiz
E kadjont ar maro.
Ni n'oump ket tud a vrezel,
Mes rei reomp aluzen,
Hag o vont d'an Tad Santel
Hor guennek zo laouen.

Astennit-ta ho tivreac'h
Azioc'h ar Frans ho pro.
Deuit, Guerc'hes, parit enn neac'h
Evel goarek ar glao.
Ar goarek-ze ziskoueze
Ne vije mui dour-beuz,
Hag e tistro grass Doue
D'ar re a ziskouez keuz.

Salaun, var skoultr eur vezen,
Evit kaout e vara,
Ne lavare ken peden
Nemet : O Maria...
Emaomp enn Ilis santel
Savet var bez ar foll,
Mari, ni deu d'ho kervel
Mirit na zaimp da goll !

Laudate Mariam

DISKAN :

Laudate, laudate,
Laudate, Mariam ! } bis.

Laudate Mam santel,
Dreist an oabl skedus,
Hor c'halounou fidel
A bigno joaüs.

Ra joumot hor mestrez,
Stereden ar mor,
C'hui eo hor rouanez,
Rouanez Arvor.

D'ar pardaës e graçou
E ti pep Breizad ;
Gant Jesus, hon Aotrou,
Ho meulomp dalc'h mad..

Var lein ar menezioù
Ar pastor denved
Varzu bolz ann envou
A lavar bepret :

Var ne bagig dister
Ar martolod paour
Lavar d'he vam dener
Gant eur Galoun aour :

Gant an oad daoubleget
An tad-koz en ti,
Diskabel daoulinet,
N'hean d'ho pedi.

An ælig mailluret
En he gavel stris,
Epad ma zeo kousket,
Ho ped en he c'his.

Breizis a vianik
Beteg ar maro,
Ho c'haloun birvidik
Laouen a gano :
E pales kaër Jesus
Bodet dizoursi,
Eun deis ni vo eürus
En dro da Vari.

Kantik en henor da Itron Varia ar Mor

VAR DON : *Kantik Beg ar Raz.*

DISKAN :

Guerc'hez, Rouanez an Arvor,
Roit ho pennoz d'an dud a vor !
Pedit, pedit ho Mab Jezuz
Da veza ouzomp truezuz.

Hor micher-ni a zo henvel
Ouz micher goz an Ebestel ;
Ni evelldho a rank poania
Er mor da c'hounit hor bara.

C'hoazet hon euz eur goall labour ;
Nag a zanjeriou var an dour !
Mes gant ar Verc'hez benniget
En danjer e vimp diouallet.

Pa 'z omp tolet ha distolet
Dre nerz avelou dirollet,
Beillit varnomp, o Mamm dener,
Hon diouallit diouz ar reier.

En hor beachou ez euz c'hoaz
Danjeriou all, danjeriou braz :
Danjeriou 'vit an ene kez...
Bezit hor skoazel, o Guerc'hez.

'Vit plijout d'ho kalon a vamm,
Ni ho pugale vo divlamm ;
Pe ni vo tost, pe ni vo pell,
D'hon deveriou e vimp fidel.

Bemdez e larimp hor peden,
Evel ma tle pep guir gristen,
Ha morse ne jomimp re bell
Heb tostât ouz an daol zantel.

Pa zeui hon devez diveza,
Ni ho ped, Itron Varia,
Deut da sturia hon eneoù
Betek porz euruz an Envou.

Kantik da Zant Jozeph

evit an Iliz hag ar Franz

VAR DON : *Guerc'hez sakr.*

DISKAN :

*Sant Jozeph, o patrour benniget,
E kreiz hon trubuilhou, ni c'houlenn ho skoazel.
Difennit, ni ho ped, hor bro muia-karet, } his
Difennit an Iliz santel.*

Hirio 'n hor bro an drouk-sperejou
A zo evel dichadennet.

En ho enep, euz lein an envou,
Ganeoc'h ra vezimp difennet.

D'an Iliz sakr ha d'he merc'h hena
Satan a ra eur brezel kriz.

Hor bro e karfe digristena,
'Vit essoc'h diskar an Iliz.

Guechall ho peuz, enep Herodez,
Laket Jezuz e sayete.

Hirio, gant ar memez madelez,
Diouallit mad Iliz Doue.

Gevier ha breinadurez heuzuz
A bep tu deomp en em astenn.
Dioc'h ho bilim, Tad karantezuz,
O ni ho ped, deuit d'hon difenn.

Roit deomp bepred ho skoazel nerzuz,
Da veva e guir gristenien,
Da gaout 'veldoc'h eur maro euruz,
Hag ar baradoz da viken.

Kantik Sant Per, patrour ar barrez

TON : *Eun Doue a zeu d'ho kervel.*

DISKAN :

*O Sant Per, prins an Ebestel
Plijet rei deomp ho pennoz ;
Ha deomp holl, en heur da vervel,
Digorit ar baradoz.*

Euz a gærik Bethesda
Ez oa ginidik Sant Per ;
Eno, vit gounit he vara,
Pesketa oa he vicher.

Eun dervez, ar Zant oue galvet
Da guitât he ronejou ;
Gant Hor Zalver oa bet choazet
Da besketa eneoù.

Per, etouez an holl Ebestel,
Oue laket er renk kenta ;
E bagik an Iliz santel
E oue karget da sturia.

Bag Sant Per zo en hon amzer
Hejet gant avelou foll,
Mez ken gwiziek eo ar sturier
Ma ne iel biken da goll.

Sant Per, epad ar Bassion,
 A rêas eun torfed braz.
 Dallet gant ar brezompson,
 Teir guech he Vestr e nac'has.
 Daoust d'he bec'hed beza grevuz,
 Ne ra ket evel Judaz.
 Gouzout 'ra : Trugarez Jezuz
 Zo ledan 'vel ar mor' braz.
 Ni ive hon euz aliez
 Nac'het Jezuz, 'vel Sant Per.
 Velthan ni gavo trugarez
 E Kaloun zakr Hor Zalver,
 Evit skigna ar feiz kristen,
 Kalz a boan a gemeras,
 Ha zoken, evit he difen,
 Ez eo mario ouz ar groaz.
 O Sant Per, hor patron karet,
 'Vidomp holl pedit bemdez,
 Ma vo miret ha kennerzet
 Ar feiz kristen er barrez.

Kantik Sant Paol

*Kenta Eskop bro Leon, an hini a brezegas ar feiz
 en hor bro hag a ziazezas parrez Guitalmaz.*

Kanomp, kanomp a greiz kalon,
 Meuleudi Sant Paol a Leon,
 Ha goulennomp, dre ar beden, } *bis.*
 Eus he vennos an aluzen.
 Gant tud chentil huél savet,
 Paol, e Bro-Zaôd a zo ganet ;
 Lagad Doue, gant he vennos,
 A bare varnhan deiz ha noz.

E skôl Sant Iltut dizale
 Paol a zesk mad lêzen Doue ;
 Tremen a ra he iaouankis,
 Oll da Jesus, oll d'an Ilis.

Hermit iaouank, beleg santel,
 Galvet da zont da Vreiz-Izel,
 Lezit ho pro, treuzit ar mor,
 Ha deuit brema varzu Arvor.

Kalon ar bobl a zo rannet,
 O klevet Paol o lavaret :
 Va bennos deoc'h ! ha ken-avo,
 Er Barados evit ato !

Gant enn neubeudig tud-Doue
 Var eul lestr skan e pign neuze :
 Gant El ar mor al lestr henchet,
 Dirak Eussa a zo kasset.

Diskenn e ra en enezen,
 Evit prezeg ar feiz kristen ;
 Gounit e ra dre nerz komzou
 D'ar guir Doue kals eneo.

Tud an enez 'zo glac'haret,
 Pa lavar Paol ez eo galvet
 Da vont larkoc'h e douar Breiz,
 Evit kass sklerijen ar feiz.

Dont e ra beteg Enez-Vaz,
 En eur ober burzudou bras ;
 Digemer mad hen deus eno
 Digant Witur, roue ar vro.

Kichen ar mor, en eun toul doun,
 E zeus eur sarpant bras-estoun,
 Hag a ra spount an anezen ;
 Rag drebet hen deuz meur a zen.

Hep aoun ebet, setu ar Zant
O vont da stourm ouz ar sarpant.
Al loan a iud, an dud a grèn ;
E pep kalon e zeus anken !

Gant eur stôl zantel ehadennet,
Da heul ar Zant e rank kerzet.
Tol't eo var he benn er mor bras :
Oh ! pebeus joa en Enez-Vaz !

Anaoudek mad d'an den zantel,
Witur 'ro dezan he gastel.
Neuze Paol a dreñen ar mor,
'Vit dont da jomm da Oxismor.

Kear Oxismor zivar neuze
Zo gounezet-oll da Zoue.
Chenchet eo an hano dezhi,
Ha Kastel-Paol e rer outhi.

Nag a draou kaer ha burzudus
A ra Sant Paol abers Jesus !
Ar mud a gomz, ann dall a vél,
Ar pec'her paour a zeu santel !

El lanneier hag er c'hoajou
Men-hir, dolmen ar fals doueou
Dre nerz ar zant 'zo diskaret,
Ha kroaz ar C'halvar 'zo savet.

Gant ar Roue ha gant ar bobl
Goulennet eo evit Eskob,
Kenta eskob a vro Leon :
Oh ! nag a joa e pep kalon !

Goude buez hir ha santel,
Pol 'zo brema e renk huel,
E touez ar Zant hag an Elez,
Gant kurunen ar zantelez.

Kaer eo ar c'hleuziou alaouret,
Kaer eo an Tour-Dantelezet,
Kaeroc'h eo c'hoas, Eskob santel,
Hoc'h Ilis-Veur e kear Gastel !

O gouel dispar, gouel a enor,
Gouel a vennos evit Arvor !
Tridal a ra kalon an oll,
En eur zével varzu Sant Paol.

Euz bar an env, o Sant Patron,
Sellit gant joa ouz tud Leon,
O kana deoc'h meuleudiu
Gant ho c'halon hag ho moueziou.

Ho Relegou a zo brema
Enn Arched-aour ar skedussa,
Ha dirazo hiviziken
Ni gasso deoc'h mouez hor peden.

Grit ma jommo griziu ar feiz
Doun e kalon kristenien Breiz,
Evel griziu ar guez dero
E kreiz kalon douar hor bro.

D'ar iaouankis roit furnez,
D'ar vugale sentidigez,
Ha d'ar gosni kalon nerzus,
'Vit divoaska buez poanuis.

Gant alc'hoez aour ho pedennou
Digorit deomp dor an envou,
Ha ni 'gano deoc'h mill bennos
E kreiz dudi ar Barados.



Kantik Sant Izidor

Patroun al Labourerien douar

Var don : *Kelven, pe : Breuriez ar Feiz.*

DISKAN :

*Sant Izidor benniget, patroun al labourer,
Ra vo meulet hoc'h hano dre holl e peb amzer;
Al labourerien douar a c'houlenn ho pennoz,
Ma vint ganeoc'h sikouret da vont d'arbaradoz.*

Izidor a oa ganet e Spagn, en eur gær vraz (1),
Hag eno a vihanik 'vel eur zant e-veas.
Bet hen doa digant Doue kerent mad ha santel
Aketuz da zoursial euz ene ho bugel.

P'e deut en oad, Izidor da c'hounit he vara,
Da di eunn den pinvidik ez a da zervicha ;
He vestr, hanvet Yann Vergas, hen doa kalz donarou
Ha ganthan e oue karget da ren al labourou.

Euruz ar penn-tiegez, pa c'hell fiziout peb tra
En dud a rank da gemer 'n he di da zervicha.
Euruz ar zervicherien a gav tiez kristen
Lec'h ma ve lezen Doue heuillet a benn da benn.

Bep mintin sant Izidor oa fidel d'he beden ;
Bemdez zoken oa kustum da vont d'an oferen :
He holl zevosionou vije achu abred,
Hag ouz labour he zereze ne reant gapu ebet.

Daoust ma oa en he labour ar Zant direbech kaer.
Guall deodou hen tamallas divarbenn koll amzer ;
He vestr hen dije kredet, panefed ma plijas
Gant Doue, d'hen didrompla, obereur burzud braz.

Mestr Izidor, eun devez, da c'hout ar virione,
A ia var hezouarou da ober eur bale.
Guelet 'ra he zervicher 'kreiz eur park oc'h arat,
Gant daou Elguenn 'n he gichen, daou Elo labourat !

1) E Madrid, kær kapital bro Spagn.

Liez a vech, dorn Doue a reas burzudou,
Evit lakât da bara muioc'h he vertuziou ;
Eur vech, gant beg he c'harzou, 'neur skei var an
Ar Zant 'lakas da zavel eun eienen dispar, [douar,

Meur a vech all, d'he vignoun Doue 'rentas henor :
Diou vech ar boued a greskas dre beden Izidor ;
Ar Zant a oa he galoun ker mad euz ar beorien
Makave gras ho guelet, ha rei d'e aluzen.

Ni labourerien douar, evel hor patroun ker,
Hervez bolontez Doue, implijomp hon amzer ;
Pedi, gouzanv, labourat, rei sikour d'an dud kez,
Eo merk a vuez kristen, guir hent ar zantelez.

Peden araok kuitât an Iliz

TON GALLEK : *Avant de quitter notre Maître.*

Araok kuitât Jezuz Hor Zalver,
En em daolomp en he Galon ;
Eno hebken, eno e kaver
Ar peoc'h, an eurusted guirion.
Araok kuitât, etc... (*Beteg : Eno hebken...*)

Deoc'h ô Mari, Mamm a garantez,
Kenavo e laromp ive.
Pa zigouezo termen hor buez,
Hor c'hassit holl ganeoc'h d'an Ee.
Deoc'h, ô Mari, etc...

Ha c'houi, Pried santel ar Verc'hez,
Jozeph, bet truez ouz hor stad ;
Beillit varnomp a hed hor buez,
Ha grit deomp kaout eur maro mad.
Ha c'houi, Pried santel, etc...

Kannaded Doue, Elez santel,
Sellit ouzomp gant trugare ;

Astennit varnomp ho tiouaskel ;
Grit deomp kerzet varzu an Ee.
Kannadet Douo, etc...

Bezomp sonj mad euz hon tud varo,
Euz hor c'herent, hor mignouned ;
Pedomp ha greomp pinijen vitho,
Ma vint heb dale diboniet.
Bezomp sonj mad, etc...

Kantik Hent ar Groaz

Ober Hent ar Groaz a zo mont d'ar pe-
varzek Station, ha choum eur pennadik
e pep hini anezho, da zonjal e Passion Hor
Zalver, dreist holl er poaniou merket var
bep taolen.

Lakât ar spered da zonjal a zo avoalc'h,
heb ma ve red ober a c'hinou an distera
peden. Eun dra vad eo koulzskoude lava-
ret, e peb Stati n, eur *Bater*, eun *Ave* hag
eur *Gloria Patri*, gant eun Akt a Gontri-
sion.

Devosion Hent ar Groaz a zo talvouduz
meurbed d'an eneoù kristen. Deski a ra
dezho kassât muioc'h-mui ar pec'hed, ha
karet Hor Zalver a greiz ho c'haloun. En
eur ober Hent ar Groaz, e c'hellont ive
gounit eun niver braz a Indulgansou, pe-
evitho ho-unan, pe evit an Anaoun.

VAR DON : *Au sang qu'un Dieu va répandre.*

DISKAN (dirag an Aoter vraz) :

*Heuillomp holl, heuillomp a spered
Jezuz beteg ar C'halvar ;*

*Sonjomp en he boaniou kalet,
Sonjomp ennho gant glac'har,
O Salver leun a garantez,
Dre ho kroaz hag ho poaniou,
Grit ouzomp eur zell a druez,
Pardounit hor pec'hejou.*

En eur vont d'ar Stasion genta :
*Grit ma vezo, Mamm beniget,
Gouliou Jezuz krusifiet
En hor c'haloun skrivet doun.*

Dirag ar Stasion: *Adoremus te, Christe.
Pater, Ave, Gloria.
V. Miserere nostri... Fidelium... Sancta
Mater.*

KENTA STASION
Jezuz kondaonet d'ar maro.

Da Bilat, 'vit beza barnet
Ez eo kasset Hor Zalver ;
D'ar maro ez eo kondaonet,
Daoust ma oa direbech kaer.
Ha pa glev ar zetanz douget,
Ne ra ket eur gler naden...
Pebez skouer a basianted
Deomp-ni holl he ziskibien !

EIL STASION
*Jezuz sammet euz he groa..
Gant he vourrevien d'Hor Zalver
Setu digasset he groaz.
Heb marc'hata e tigemer
Ar bec'h-se var he ziskoaz.
Jezuz, ar c'hroasiou hor bezo
Da zougen hed hor buez
Grit m'ho digemerimp ato
Gant guir feiz ha kar atez.*

TREDE STASION

Jezuz a gouez dindan he groaz.
 Jezuz, dinerzet he vemprou
 Gant ar goad hen deuz kollet,
 'Gouez d'an douar ; hag he boaniou
 Gant al lamm a zo kresket.
 Dre an tourmanchou ker skrijuz
 Ho peuz 'vidomp gouzanvet,
 Grit deomp ato, Salver Jezuz,
 Choum heb koueza er pec'hed.

PEDERVED STASION

Jezuz a zigouez gant he Vamm zantel.
 Prestik e tigouez Hor Zalver
 Gant he Vamm muiä-karet ;
 Hag ho c'halonou ken tener
 Gant ar boan a zo goasket,
 Kalonou Jezuz ha Mari
 Rannet gant hor pec'hejou,
 Ni ziouallo da nevezi,
 Divar vreman, ho poaniou.

PEMPED STASION

*Simon ar Syrenëen a zikour Jezuz da
 zougen he groaz.*
 Aoun a zav gant he vourrevien
 Ne varfe dindan he groaz ;
 Lakât 'reont ar Syrenëen
 Da rei dezhan eun taol skoaz.
 Pa vez evidomp re bounner
 Ar C'hroasiou 'rankomp dougen,
 Tostait ouzomp, o va Zalver,
 Plijet ganeoc'h hor zouten.

C'HUEC'HVED STASION

*Ar Veronik santel a zec'h he vizaj
 da Jezuz*
 En eur velet bizaj Jezuz
 Saotret holl gant kranch ha goad,

Ar Veronik trugarezuz

D'he gempen a gred tostât.
 'Vit an aktou da rapari
 A ginnigimp d'Hor Zalver,
 Diganthan omp sur, evel dhi,
 Da gaout ive grassou kaer.

SEIZVED STASION

Jezuz a gouez evit an eil guech.
 Ken dinerz eo breman Jezuz
 Ma kouez adarre, siouaz !
 Hag, er stad-se ken truezuz,
 He boaniou zo kresket c'hoaz.
 O va Zalver, eur vech savet,
 Mar kouezan-me a neve,
 Astennit ho tourn benniget,
 'Vit ma savin adarre.

EIZVED STASION

Jezuz a gomz ouz merc'hed Jerusalem
 Pelloc'h, var an hent e tigouez
 Eur rummad merc'hed euz kær ;
 Hirvoudi a reont gant truez
 O velet stad Hor Zalver
 Hen ho c'helen da skuill daelou
 Var ar pec'hed kaoz d'he boan.
 Var he boan, var hor pec'hejou
 Gouelomp ive hon-unan.

NAVED STASION

Jezuz a gouez evit an deirved guech.
 Araok mont beteg ar C'halvar,
 Jezuz a gouez eur vech c'hoaz.
 Daoust d'he boan, ha daoust d'he
 [c'hlae'har

A nevez e samm he groaz.
 Jezuz, 'n eur zevel heb dale,

C'houi ro domp-ni eur gentel :
Poania, mar kouezomp adarre,
Poania buhan da zével.

DEKVED STASION

Jezuz tennet diganthan he zillad.
Var ar menez pa zigouezas,
He vourrevien tud diroll,
He vourrevien hen diviskas
Dirag daoulagad an holl.
Dre ar boan ho peuz gouzanvet
Er stad-se, o va Jezuz,
E paeit ar poaniou dlêet
D'an holl bec'hejou mezuz.

UNNEKVED STASION

Jezuz staget ouz ar groaz.
Da rei evidomp he vuez
Jezuz hen deuz eur c'hoant braz,
Ha, poulzet gant he garantez,
En em astenn var he groaz.
Ouz ar groaz raktal eo tachet
Dre zaouarn he vourrevien,
Red e ve kentoc'h lavaret :
Dre zaouarn ar bec'herien !

DAOUZEKVED STASION

Jezuz a varv var ar groaz.
Goude teir heur poaniou skrijuz,
Poaniou 'vel ne oue biskoaz,
Siouaz ! setu maro Jezuz...
Stouomp holl dirag he groaz !
O Mari, dre ho rann-galoun
Dirag Jezuz o vervel,
Diganthan goulennit 'vidoun
Eur maro mad ha santel.

TRIZEKVED STASION

Korf Jezuz distaget ouz ar groaz.
Gant daou ziskibl trugarezuz
He gorf sakr zo distaget ;
'Tre divreac'h he Vamm druezuz
Ez eo laket gant resped.
Pa zaimp dre ar gommunion
Da reseo korf Hor Zalver,
D'hen reseo gant devosion
Hor zikourit, Mamm dener.

PEVARZEKVED STASION

Korf Jezuz lakeat er bez.
Setu breman he gorf maro
Sebeliet, douget d'ar bez ;
Mes d'an trede deiz, ac'hano
E savo leun a vuez.
Va c'horf-me ive a ranko
Mont heb dale d'an douar
O va Jezuz, grit ma savo
Eun deiz d'an Ee leun a c'hloar.



Kantikou evit kantoun Guitalmazez

F I N